

Paotred 12, 13, 14 vloaz

Yannig ar mil micher

Me eo Yannig ar mil micher, Me eo Yannig ar
mil micher Anavezet gant ar vizer
Kloc'her tra-la-la-la-la-la-la-la-la-la-la!
la-la-la-la-la-la!

Me eo Yannig ar mil micher,
Anavezet gant ar vizer.

Me zo kloc'her, me zo sakrist,
Butuner mat ha lonker chistr.

Kemenerig, kozeer flour,
Ha miliner laer 'vel an dour.

Kere oun c'hoaz ha boutaouer,
Dibuner neud ha pilhaouer.

Marc'hadour moc'h, marc'hadour saout.
Da laerez kezeg oun eur maout.

Barner hag archer oun ive ,
Pa ne c'haloupan araoke.

Pa fell d'in beva eus va rent,
Me glask va boued a-hed an hent.

Eus a belec'h 'ta Marivon,
Ho pe gwell fortun egedon.

Koulmig Arvor.